



# Ar Redadeg

## Emvodoù Meur ar Redadeg Ar Chapel-Nevez d'ar 5 a viz Du 2016

### Emvod-Meur dreistordinal - AG extraordinaire

Cheñchamantoù er statudoù kaset gant ar bedadenn (pezh-stag)

1/ **Mellad 2** : Pa oa bet krouet Ar Redadeg e oa bet roet pep tra da zDiwan. Abaoe ar penn kentañ e soñj deomp ne c'hello ket ar brezhoneg mont war zu an diorren hep Diwan hag ivez eo mat digeriñ war draoù all, setu ma oa bet divizet reiñ an hanter eus arc'hant da zDiwan hag un hanter all evit raktresoù all.

Bremañ pa eo kresket ar Redadeg eo deuet da vezañ ur benveg e unan da gas war raok ar bzg, ezhomm hon eus ivez da c'hoprañ un den all kement a labour a zo d'ober michereloc'h micherelañ. Setu ma rankomp kaout muioc'h a arc'hant evit hor gevredigezh diwar ar pezh a vez rastellet ganeomp, ha mat eo lakaat an dra-mañ sklaer er statudoù. Ar gêr « gounid » 'zo resisaet.

“Ar gounid meneget amañ a zo an hollad a chom ur wech lakaet a-gostez ar sammad ret evit mont en dro dereat ar redadeg war lerc'h.”

2/ **Mellad 4** : Ouzhpennañ a fed gounid ar c'hask kevelerezh ha mesenerezh war zu an embregerezhioù.

“Emglevioù mesenerezh ha sponsor savet gant an embregerezhioù “

3/ **Mellad 10** : Er statudoù e vez kavet an izili diazez (krouerien ar Redadeg) a zo digoust o berzh. Koulskoude lod ne gemeront ket perzh e aozadur kreizh. Abalamour e vez paeet asurañsoù gant ar Redadeg hervez an niver a izili enni e kinnig ar Burev e vefe lammet ar statud-se evit ar re ne vint ket bet gwelet en emvodoù kreizh e-pad 3 bloaz. Evel just e c'hello an dud-mañ bezañ ezel en dro o paeañ o skodenn.

« Ar statud a ezel saver a vez kollet ma ne gemerer ket perzh e emvodoù kreiz ar Redadeg e-pad 3 bloaz da renk. »

#### ➤ **Ar cheñchamantoù kinniget gant ar burev zo degemeret a-unvouezh.**

*Changes dans les statuts, envoyés avec l'invitation (pièce jointe) :*

*1/ **Article 2** : Lors de la création de la Redadeg, l'intégralité des bénéfices avaient été reversés à Diwan. Depuis le début nous sommes convaincus que Diwan est indispensable à la survie et au développement de la langue bretonne mais que*

*d'autres projets sont également essentiels. C'est pourquoi il avait été décidé de reverser la moitié des bénéfices à Diwan et l'autre moitié partagée entre plusieurs projets liés à la langue. Aujourd'hui la Redadeg est devenue en soi un outil de développement de la langue. Par ailleurs la montée en puissance de l'association et la quantité de travail nécessaire à son organisation nécessite la création d'un second poste perenne. Nous avons besoin de garder plus d'argent sur les sommes récoltées pour organiser la Redadeg suivante. Le Bureau souhaite que cela apparaisse clairement dans les statuts.*

*« Le bénéfice en question est celui qui est déterminé après affectation d'un montant suffisant pour l'organisation de la Redadeg suivante. »*

*2/ **Article 4** : Préciser dans la liste des ressources de l'association, la recherche de mécènes et de partenariats auprès des entreprises.*

*« les mécénats et sponsors conclus avec les entreprises, »*

*3/ **Article 10** : Dans les statuts on trouve un collègue « membres de droit » qui sont les fondateurs de la Redadeg et qui sont membres sans avoir besoin de cotiser ni de participer aux réunions d'organisation. Par ailleurs l'association paie ses assurances au nombre de membres. Le Bureau propose de supprimer ce statut aux membres qui n'assisteront pas aux réunions centrales de la Redadeg durant 3 ans. Ceux-ci pourront redevenir membres en adhérent et en payant leur cotisation.*

*« Les membres fondateurs perdent automatiquement leur qualité de membre s'ils ne participent plus aux réunions centrales d'organisation de la Redadeg depuis plus de trois ans. »*

➤ **Les changements proposés par le Bureau sont adoptés à l'unanimité**

Mael, ezel eus ar C'huzul-Merañ a ginnig ur cheñchamant all : tennañ ar meneg da zDiwan diouzh ar statutoù ha lakaat anezhañ e reoliadur diabarzh ar gevredigezh. Goude un tabut eo bet divizet nompas votiñ war ar c'hinnig-mañ pa ne oa ket bet kaset a-raok an emvod ha neuze ne oa ket bet kelaouet holl izili ar gevredigezh. Kinniget e vo ar poent-mañ d'un Emvod-Meur dreistordinal all, ma fell da vMael kinnig anezhañ a-raok, ma vo kelaouet holl izili.

*Mael, membre du CA propose une autre modification de statuts : Retirer la mention de Diwan dans les statuts et l'inclure dans le règlement intérieur. Suite à un débat, il est décidé de ne pas voter sur cette proposition car elle n'a pas été proposée avant l'AGE. Ce point sera proposé lors d'une autre AGE si Mael souhaite le formuler à l'avance pour être porté à la connaissance des membres de l'association.*

## **Emvod-Meur Ordinal - Assemblée Générale Ordinaire**

E daneveloù ar brezidanted, leun a fent hag a varzhoniezh e oa memestra un nebeut titouroù da zec'hel soñj outo !

- 140000€ dastumet e 2016 pa oa bet 125000€ e 2014.
- E 2018 e vo 10vet deiz ha bloaz ar redadeg
- 1800 km a vo etre ar Gwener 4 hag ar Sadorn 12 a viz Mae 2018.
- E fin miz Kerzu e vo dibabet lec'hioù loc'hañ ha degouez.

*Rapports moraux des 2 co-présidents, Loïc (pour le passé) et Jerald (pour le futur).  
A retenir (outre leurs performances en prose et en humour) :*

- *en 2016 plus de 140 000 € de recettes ont été générées contre 125 000 € en 2014,*
- *en 2018 la Redadeg fêtera ses 10 ans,*
- *1 800 km seront courus du vendredi 4 au samedi 12 mai 2018 (100 de plus qu'en 2016),*
- *les villes de départ et d'arrivée seront connues d'ici fin décembre.*

**Danevelloù obererezh hag arc'hant - Rapports d'activité et financier** Kinniget eo bet an danevelloù obererezh hag arc'hant gant Denez Pichon (teñzorer) ha Katelin (kenurzhier). Diouzh an daolennoù ha grafikoù amañ-stag (ha kinniget splann) e c'heller menegiñ :

- **Disoc'h** : gounidoù : 298 000€, dispignoù : 137000€
- **Gwerzh kilometroù** : 212000€, 72 % eus ar gounidoù
- 3 lodenn bras a ya d'ober 76 % eus an dispignoù : (prennadennoù : 40000€, 29 % - kehentiñ : 37000€, 27 % - goprou : 39000€, 28%)
- **1769 Km** zo bet gwerzhet, 41 % da dud war o anv, 33 % eus ar gounidoù.
- Ar gwerzhioù all deus degaset 42000€ er c'hef, chom a ra evit 6000€ stok. Ur mank a 9000€ a zo war an dafar. Dav vo bezañ strisoc'h evit merañ al lodenn-mañ.
- 33500€ **yalc'hadou** zo bet war an 2 vloaz, 6300 € skoazell ar stad evit ur post labour CUI CAE e touez anezho

Ur rakvudjed kentañ zo kinniget evit 2 vloaz (2017-2018) gant Denez ha Katelin. Ar rakvudjed zo da vezañ donaet ha kadarnaet, met gwelet e vez dija e vo start war dachenn an teñzoriezh adal Here 2017. Goulennoù a sav diwar an dra-se :

- Daoust hag e c'hellomp krouiñ un eil post leun amzer (ha n'eo ket just er CDD 6 miz a-raok ar Redadeg 2018) ?
- Ha moaien 'vo da zegemer ur stajiad pe stajidi war ar c'henwerzh ?
- Ha dav e vo reiñ nebeutoc'h evit ar raktresoù ?

*Rapports d'activité et financier présentés par Denez Pichon, Trésorier et Katelin, coordinatrice (cf tableaux détaillés). Plusieurs ventilations analytiques et graphiques pluriannuelles sont exposées.*

*A retenir (outre leur performance en matière de précisions et de clarté) :*

- **résultat** : les produits 2016 s'élèvent à 298 403 €, les dépenses à 137 351 €,
- la vente des kms a rapporté 215 205 €, soit 72 % des **recettes**,
- 76 % des **dépenses** se répartissent entre trois postes : Achats (40 269 € soit 29%), Communication (37 353 € soit 27%), Salaires (39 062 € soit 28%),
- **1769 km** ont été vendus, majoritairement aux individuels (41 % des km et 33 % des recettes),
- le **mécénat** est aujourd'hui plus séduisant pour les entreprises que l'achat de publicités,

- les **autres ventes** ont généré 42 195 € de recettes et le stock restant de produits dérivés est évalué à 6 000 €, mais le manque à gagner lié aux différences d'inventaires est estimé à plus de 9 000 € : un effort reste à faire en matière de traçabilité de nos ventes et stocks !
- les **subventions** représentent 33 500 € pour 2 ans dont 6300€ d'aide à l'emploi pour un poste CUI-CAE,

Un premier prévisionnel sur deux ans 2017-2018 est présenté par Denez et Katelin (cf tableaux détaillés).

Encore assez fragiles, ces projections font apparaître des difficultés de trésorerie en octobre 2017. A revoir lorsqu'on parlera de l'avenir de la Redadeg, mais peut-on/doit-on :

- créer un 2ème poste à temps plein (et pas seulement 6 mois avant la course) ?
- accueillir un/des stagiaire(s) pour aider à démarcher les entreprises ?
- moins redistribuer aux projets ?

- **Danevelloù ar brezidanted ha kinnig ar c'hontoù votet a unvouezh.**  
**Les rapports sont adoptés à l'unanimité**

## **Dilennadeg ar C'huzul-Merañ - Élection du Conseil d'Administration**

An emvodoù miziek a vez digor d'an holl, met n'eus nemet ar merourien a c'hell votiñ. An izili dilennet a zegemer ar posteloù liammet gant ar C'huzul-Merañ.

Labouret e vez peurliesañ dre bodadoù diouzh ar mintin. E brezhoneg e vez an emvodoù hag ivez an eskemmoù dre bostel.

Er statudoù eo meneget ez eus etre 7 ha 15 den er C'huzul-Merañ, dilennet evit 3 bloaz (a c'hell bezan adkaset). Ar Burev n'eus ket c'hoant e vefe ar reolenn-mañ ur skoilh da gaout tud nevez er C'huzul. Echu eo o maread gant 5 ezel. Gant ar re nevez ez eus 25 den prest da vont er C'huzul.

- **Ur C'huzul da c'hortoz gant 15 den zo dilennet**, en o zouezh izili nevez. Un Emvod-Meur Dreistordinal all a cheñcho ar statudoù ma vo kresket an niver a izili. (*unvouezh war bouez unan neptu*).

Loic Jade en deus bet c'hoant lezel e c'harg a gen-brezidant hag er C'huzul-Merañ (chom a raio da labourat ganeomp memestra... arabat dikoni!) Trugarekaet eo bet a greiz kalon gant an holl evit al labour bet kaset gantañ e-pad meur a vloaz.

*Les réunions de CA, mensuelles, sont ouvertes à tous, mais seuls les membres du CA peuvent voter. Seuls les membres élus reçoivent les mails du CA. Des groupes de travail sont mis en place, auxquels tous peuvent participer. La langue de travail est le breton en réunion comme dans les échanges par mail.*

*Les statuts prévoient un CA de 7 à 15 membres, élus pour 3 ans (renouvelables). L'actuel Bureau souhaite que cela ne soit pas limitant et incite les présents motivés à rejoindre le CA. 5 personnes sont sortantes. 25 adhérents se portent candidats.*

➤ **Un premier CA est donc élu avec 15 membres, dont les nouveaux venus et les candidats au Bureau.**

*Une AG extraordinaire sera prochainement réunie pour modifier dans les statuts le nombre de places au CA de manière à inclure les 10 candidats restant.*

*(Unanimité moins une abstension)*

*Loic Jade a souhaité laisser à quelqu'un d'autre sa charge de co-Président ainsi que son poste au CA (tout en restant membre actif de la Redadeg...) Il est chaleureusement remercié pour le travail accompli pendant plusieurs années.*

### **Implij gounidoù Redadeg 2016 / Affectation du résultat de 2016**

Raktreset e oa bet ingalañ 144000€, an hanter da zDiwan, an hanter all evit ar raktresoù dibabet. Ar roadenn gentañ vo d'ar 17 a viz Kerzu.

Ur gudenn a sav, daoust da disoc'hoù mat Redadeg 2016, ne chomo ket arc'hant a-walc'h ganeomp evit ur mont en dro seder betek 2018 ha dreist-holl evit krouiñ un eil post a leun amzer evit 2 bloaz.

Ar preder war zavez labour an eil post zo war ar stern. Klasket e vo kaout ur skoazell gant ar Rannvro (implij kevredigezhel a interest rannvroel), gwelet e vo ivez ma vo posupl kaout un den e CAE-CUI.

- **Goude an diviz eo bet votet e vo roet ar memes sammad a hini 2014 pe dost : 124000€ (62000€ da zDiwan ha 62000€ evit ar raktresoù).** Ar C'huzul-Merañ a zivizo war ar mod da ingalañ ar sammad etre ar raktresoù. 20000€ ouzhpenn a vo lakaet evit mont-en-dro ar Redadeg.

*Les projections 2016 prévoyaient la redistribution de 144 000 €, pour moitié à Diwan et pour moitié aux projets sélectionnés. Un premier versement doit être effectué le 17 décembre.*

*Problème : au vu des dernières projections, si 144 000 € sont redistribués, la Redadeg n'aura plus assez en réserve pour consolider son fonctionnement et surtout pour créer un 2ème poste salarié pérenne à temps plein pendant 2 ans..*

*Katelin précise que le travail sur le profil de poste est en cours, ainsi qu'une démarche auprès du Conseil Régional pour créer un nouvel Emploi Associatif d'Intérêt Régional (aide à l'emploi dégressive sur 4 ans). Les autres dispositifs nationaux sont aussi à l'étude (CUI-CAE, contrat d'avenir...).*

- **Vote sur l'affectation du résultat : 20 000 € supplémentaires sont affectés pour organiser la Redadeg 2018. 124 000 € vont être redistribués : 62 000 € pour Diwan et 62 000 € pour les projets. Le CA décidera ultérieurement de la répartition de cette somme entre les projets.**

### **Raktres pladenn evit 10 vloaz ar Redadeg - Projet de CD pour les 10 ans de la redadeg**

Ur raktres CD gant kanaouennoù (ofisiel pe pas) Ar Redadeg zo kinniget gant Katell, labouret he deus evit-se gant Kadvael Jolivet eus ar strollad Silwink. Er CD e c'hello ivez bezañ kavet kanaouennoù savet a-ratoz evit an 10 vloaz, goulennet digant arzhourien 'zo, ha kanaouenn ofisiel Redadeg 2018.

Ar soñj zo embann 1000 bladenn, dav vefe gwerzhañ 750 10 € an tamm evit kempouezhañ ar budjed, moaien vo embann reoù all ma n'eus ket a-walc'h.

- **Degemeret eo ar raktres a-unvouezh war bouez 5 den chomet neptu. Ur strollad a vo savet da labourat war ar raktres.**

*Ur projet de CD compilant une sélection de chansons (officielles ou pas) est proposé par Katell. Elle à travaillé à cette proposition avec Kadvael Jolivet du groupe Silwink. Sur le CD on trouvera également des chansons inédites demandées à certains artistes bretons, ainsi que la chanson officielle de la redadeg 2018.*

*1000 CD pourraient être réalisés, dans l'idée d'en vendre 750 à 10 € pour amortir les frais engagés, le surplus de vente générant des recettes.*

- **Le projet de CD « 10 ans » est adopté à l'unanimité moins cinq voix. Un groupe de travail sera créé pour ce projet.**

## **Tem Redadeg 2018 - Thème de la redadeg 2018**

### **Brezhoneg liesliv**

*Langue bretonne multicolore*

- **Votet a-unvouezh - adopté à l'unanimité.**

## **Abadenn « Lid ar chekennoù » - Remise des chèques**

Betek-henn e veze pedet dougerien ar raktresoù evit un emvod kelaouiñ lec'h ma veze roet dezho hanter ar sammad divizet ganeomp. Ar bloaz-mañ hon eus c'hoant da aozañ un abadenn un tamm plijusoc'h. Kinnig a ra ar strollad e-karg an aozadur ober an dra-se e Karaez e fin an abardaez. D'ar 17 a viz Kerzu e vo. Pal an abadenn zo lakaat ar gaoz war Ar Redadeg d'ur mare ma ne vez ket graet kalz ha diskouezh ar pezh a vez graet gant an arc'hant eostet.

Kendalc'het e vo gant ar soñj-mañ diouzh ar budjed a c'hell bezañ roet. Pedet e vo lod eus ar re a zo bet skoazellet ar bloavezhioù tremenet da zont da ziskouezh ar pezh o deus savet a-drugarez d'ar skoazell-mañ. Pedet e vo ivez, ar mesened pe skoazellerien vras, dilennidi, ar skipailhoù lec'hel... Skignet e vo ar film bet savet ar bloaz-mañ gant Trigone Produktion ma c'hallomp.

*Le 17 décembre 2016 un premier chèque sera remis aux porteurs de projets financés par la Redadeg. Seul objectif de l'événement : montrer aux média ce que fait la Redadeg de l'argent collecté, et rappeler ce qu'est la Redadeg / quels sont ses résultats. Difficulté : mobiliser les journalistes et les entreprises concernées.*

*Jusque là l'événement se déroulait un samedi vers 11h.*

*Une équipe de jeunes est déjà missionnée pour organiser l'événement. Ses défis ? Trouver à peu de frais une formule un peu plus prestigieuse, en deux temps peut-être : 1/ remise officielle + apéro dînatoire, 2/ fête ouverte à tous. Idées avancées : organiser une soirée jeux avec des enfants ? un repas puis un fest-noz un samedi soir ? Aux halles de Carhaix ou dans une plus grande ville ? Les anciens porteurs de projets seront invités, avec leurs réalisations, pour témoigner et montrer ce qui peut être fait.*

## **A bep seurt - Divers**

Katelin a gaso ur roll a strolladoù labour da bep hini da lakaat e anv er strollad a blij dezhañ

Katelin adressera à tous la liste des commissions et groupes de travail, à chacun de s'inscrire dans celui ou ceux qui le motive(nt).

Ur strollad labour vo adlañset gant Jm, Bernez, Florian evit labourat war gairer ar c'hargoù an diaz-titouroù.

Un groupe de travail va être relancé pour travailler sur le cahier des charges de la bases de données (Jean-Michel, Bernez, Florian)

### ➤ **Burev nevez / Nouveau Bureau**

Ken-brezidanted / *Co-présidents* : Jerald ar Gov ha Leila Simon

Sekretourez/*Secrétaire* : Berc'hed Kallag ; eil-sekretour/*suppléant* : Jean-Michel Sanner

Teñzorer/*Trésorier* : Denez Pichon, eil-deñzorer/*suppléant* : Fulup Kere